


MARIA PRAT

Chadenn ar Galeour



Brued Nevez

MARIA PRAT

CHADENN AR GALEOUR

Pez-c'hoari e tri arvest

BRUD NEVEZ

1981

CHADENN AR GALEOUR

Pez-c'hoari e tri arvest

ROLL AR HOARERIEI

Lom an Dosenn.....	50 vloaz
Soazig, e verh.....	20 vloaz
Gwill, paotr an asurañsou.....	40 vloaz
Ronan, an torfetour.....	35 vloaz
Francine.....	45 vloaz
Jelvestr, he mab.....	25 vloaz

Ar Mêr

Ar Person

Anton an dall

Mona goz, ar baourez

Ivona, eur plah yaouank

Tinig, eur plah yaouank all

Mamm-goz

Bed c'hoaried evid ar wech kentañ e 1977 gand

Strollad Beilladegou Treger

Peb gwir mred striz gand Maria Prat ha Brud Nevez.
Diskleried hervez al lezenn: eil trimiziad 1981
Bed moullad ez-prevez gand BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29200, BREST.
I.S.S.N.: 0399-7014

DIVIZ KENTAÑ

LOM

(o tond gand eun horolaj)

Lared vez penaoz Lom an Dosenn a zo e horolaj war-lerh, med penaoz na vefe ked, gand eur hoz mekanik evel-henn? Pa ha an noade vihan war a-raog, e teu an noade vraz war a-dreñv

N'eus forz, daoust ma n'on ked deuz ar vicher, pell ahane!, eh an da êsaad dresañ anezañ, rag ne brenin ked unan newez ivez, foeltr gar din (1)

RONAN

(o tond)

Salud, Lom an Dosenn!

LOM

(souezed)

Ya, med sell 'ta piou an tonner a zo arru amañ! Rona, me zoñje din e oas êd da vale da favelged (2) n'ouzon ked da beleh, hag e out ar ru endro, ha d'ober petore micher?

RONAN

Arsa, goud a rez mad em-eus desked daouzeg micher hag em-eus da heul trizeg mizer, ha c'hoaz mizer, arabad din lared, rag pa ne gavan ked eur labour d'ober, e kavan eun all.

Ha te, o vond da beleh out gand an horolajze?

LOM

Feiz sur, da êsaad dresañ anezañ, pa na ha na war a-dreñv, na war a-raog.

RONAN

Dresañ anezañ? Diskwel din, med da betra na brenez ked unan newez rag te a gle kaoud arhant?

LOM

Arhant? heu... n'on ked avad milioner, med (1) evid netra. (2) fas vergled.

med n'on ked ivez paour-du.

RONAN

Nann, med c'hoant dastum ar béd 'n eur gogenn u (1). Sell, ma teus eun tamm alhwez aze, me ha da divouzelloi hennez ha da lakaad anezañ da vond 'vel newez peogwir e laran dit eh on Daniel mil micher. (Azezañ a ra).

LOM

Ma feiz avad, n'am-eus nag alhwez na dizalhwez, med sell amañ eur boentenn gamm hag a raio an afer, hag eur bluenn yar deuz lost ar hog da diboultrañ an diabarz.

Hola, arru a zo unan mad all amañ c'hoaz hirie; red eo lared emañ an deiz.

GWILL

(o tond)
Salud, tud vad, war ar labour, me gred?

LOM

Salud, krak-aotrou!

RONAN

War ar labour, a lerez? Kentoh emañ ar labour warnon.

LOM

Ha te a zo 'michañs o klask diwall deuz ar gwall-reuz?

GWILL

O, istoh evidon a zo, hirie beure em-eus gweled unan, sellet, oh ober sin ar groaz evel henn. Hemañ a zo o soñjal penaoz bewañ hemañ heb skuizañ hemañ, na lakaad beh war hemañ.

RONAN

Hañ! Hennez avad a oufee ober katechist!

(1) dastum kalz arhant

LOM

Ya, sell ze eur skol newez d'ober tud didalvez. Ha te a zo êd er gompagnenez-se ivez?

GWILL

A! n'on ked avad, me zo êd 'n eur gompagnenez da zikour tud ma bro, me gred. Se zo kaoz eh on o redeg an tier, sellet, oh ober asurañsou.

LOM

Petra a lerez aze? Se zo galleg; med te sur, zo bed er skol.

RONAN

Me zo ivez, e skolig ar louarn.

GWILL

'Hanta 'vel-henn ah eo, ar Hoñsul.

LOM

Hañ ya, Napoleon Bonapart.

GWILL

Just ar seurt-se; ya, 'n-eus grêd eur lezenn 'vid an hini a garo, selaou, sell, e raio an dud beb a doullad gwenneien, lakeom peb a eur skoed hag e vo grêd eur hev.

LOM

Hañ ya, kéf Nedeleg.

GWILL

Med nann, arhant vo lakeed er hev-se ha ma varv an hini an-nevo asured e vuhez, an den a doucho eur pakad arhant.

LOM

Hañ hañ! An hini maro a doucho arhant? Med petra a raio gante?

RONAN

Da gomañs, toud an dud a varvo, an hini vo ked lahed.

GWILL

Tud a hiz koz, tud diwar ar mêz, lezet ahanon da lared dah penaoz ne gomprenet netra hag e vo diêz lakaad ahanoh da heuill lezennou nevez. Ha koulskoude e vo red ober, sellet, 'benn kant vloaz pe kant hanter-kant vloaz amañ, e vo asured toud an dud, toud an treou, gweled a refet.

LOM

Gweled a rin? 'Benn kant hanter-kant vloaz amañ? Se zinifi 'mo ked torred ma horn-butun c'hoaz 'benn neuze?

RONAN

Geo, pell a vo, pe e vo torred dit, med he-mañ zo eun spes "lennerez planedennou" hag e houlennez petra diganim neuze?

GWILL

Feiz sur, eur skoed, hag eh asurin dah ho puhez.

RONAN

Euz peleh e roin eur skoed dit pa n'em-eus ked daou liard.

LOM

Me 'm-eus, marateze, med avad, mired 'ne a rin pa 'h int din 'vel eo ma buhez din ivez; n'on ked o vond da rei aneze da gas da Napoleon.

Nann, nann, dastum da baperou, ha kemer toull an nor.

GWILL

Pennou kaled, c'hwi po keun hag a deuio war

ma lerh, ya, med war-lerh. Kenavo.

LOM

Biken avad na 'mo keun, med bepred eh an war da lerh. (Mond a ra er-mêz).

RONAN

Ed out er-mêz, Lom? A! Pa'm-eus lared n'em-oa ked daou liard, e teud responted: "me 'm-eus, med mired rin aneze." Ya, marteze; mankoud a ra din kemer pasianted war-dro ar hoz horolaj-mañ, ha tamm-ha-tamm e klevin peleh emañ da yalh. Ha honnez a vo din, ha c'hoaz ne vo ked sammed ma hoñsiañs, ha da gomañs n'em-eus hini ebed.

LOM

Karzed eo, ar honter loegech. Kemeret 'n-eus garront ar vouillenn. Ne zoubetan droug ebed dezañ, nemed sac'hañ 'n eur geuruegell bennag gand e baperiou. (1-2)

Te ne larez ger ebed, Ronan. N'a ked mad an treou?

RONAN

Mond a refont.

FRANCINE

(o tond)

Deiz mad da oll dud an ti-mañ.

LOM

Ya, med sellet 'ta piou a zo arru amañ? Peltore itron; ne oan ked avad o hortoz ahanoh.

RONAN

Neuze'ta, e talh tud d'arruoud ha ne oas ked o hortoz?

(1) loegech=keleier faoz. (2) keuruegell=leh leun a vouillenn.

10
LOM

Ya 'vad, Lared 'mije dah, Francine, azezañ paneverd e santan penaoz n'oh ked arru amañ gand eur gôz da blijoud din.

FRANCINE

Abalamour da betra na blijo ked ma hōz dah, peogwir me gred e plijo d'ho merh, ha lezet 'hanon da lared dah penaoz dever hag evurusted eun tad 'vel eur vamm eo klask eurvad o bugale.

Ma mab Jelvestrig deuz kreiz ar mor a zoñj 'n ho merh Soazig, ha hi ivez, deuz 'mesk he zaout, me zo sur, a zoñj ennañ.

LOM

Petra 'peus lared aze? Deuz 'mesk he zaout? C'hoant 'peus da lared eo ma merh eur plah-saout? Hag ho mab, petra eo? eur pesketêr morued, me gred e talh Soazig eur renk uhelloc'h o vesañ saout he zad evid o vond gand ho mab d'ober kampagn al laou (1).

FRANCINE

Arsa, Lom, n'et ked da 'n em gemer med lezet 'hanon da achui ma hōz ha da lared dah penaoz n'eus micher dishenorabl ebed. Ma eo êd ma mab da vartolod, eo dre m'e-neus kolled e dad en-bugel ha war-ze, 'm-eus renked gwerzañ ma zaout ha lezel ma douar.

LOM

Ya, ya, bed oa ho mab o kontañ ze din hag o klask kontañ kêjou brao d'am flahig, med hola, gorozit.

FRANCINE

'Hanta ya, bed e oa, junted o hōz hag êd ar joa hag an esperañs 'n e galon da adkemer e vatimant, med sur 'n-eus kaved hir an amzer abaoe o soñjal er plah yaouank. Ha bremañ, 'n eur porz-mor, 'n-eus kaved eur hamarad

(1) beza er vizer (kampagn an Douar-Nevez)

11

o tond d'ar gêr ha hennez zo deud deuz e berz da lared din dond beteg amañ da weled Soazig ha da houlenno ho ker

LOM

Koll ho poan hag hoh amzer ho-po grêd, rag ma ger n'ho-po ked, na ma merh na welfet ked pa n'emañ ked er gêr. Ha na pa vije, me zo mestr dezi pa eo minorez.

RONAN

Amañ 'm-eus aon, vo stard ar foenn da dennañ. Lom an Dosenn n'eo ked Breton evid netra.

FRANCINE

Me ha da lared dah penaoz Lom n'oh ked muioh mestr d'ho merh evid na 'h on-me d'am mab. Ar vugale zo prested d'o zud gand Doue ha n'eo ked glead stourm oute nemed bezañ a vefent o vond en eun hent treuz bennag.

SOAZIG (o tond)

RONAN

Setu arru an hini wellañ.

SOAZIG

Deiz mad, Ronan. O! Francine, deiz mad.

FRANCINE

Deiz mad 'ta, Soazig ma flah vihan.

LOM

Me zoñje din oas êd d'ar bourk hag eh out aze?

SOAZIG

Bed eh on er bourk, med perag Francine n'oh ked azezed?

12
LOM

Arsa, me eo a zo da lared d'an dud azezañ ma 'mez c'hoant, n'eo ked te, rag me eo ar mestr amañ, hag e vin c'hoaz eun toullad mad a vloaveziou.

SOAZIG

Ma zad, heti ran dit, med n'eo ked glead da den ebed kemer kement-se a don da lared "Me zo mestr war ar reou all."

RONAN

Lom, ar lapoused, pa deu ar houlz, a nij er-mêz an neiz, hag ar vugale o-deus droed d'ober memez tra.

FRANCINE

Te gêze mad, Ronan. Sikour 'hanon da rei ze da gompren da Lom.

RONAN

Hep la! Me 'm-eus eur loerou ruz da lakaad, pas muioh evid eur reou a liou all ha n'on ked o vond d'ober bazvalan, nann, me n'houlan ked bezañ tamalled na taped a-bouez ma zeod; nann, c'hwi 'n em ingalo etrezoh bu-annoh 'vid na dresin-me ar hoz tako-mañ.

FRANCINE

Lom, ma ger diwezañ. Goulenn ran diganah ho merh hag ho kouzantamant d'ober an dimezi pa vo distro ma mab 'benn eun toullad zunveziou amañ.

LOM

Ma merh a hortozo ken 'mo kaved dezi unan deuz ma doare.

SOAZIG

Te, ma zad, oa dimezed d'an hini oa plijed dit.

13
LOM

Ya, da unan hag a-devoa kemend a leve evel-don. Ha te a ranko ivez kaoud unan hag a-nevo kemend a arhant ha te, rag amañ zo kantskoedien, ya n'emaint ked er bank nag en daol-doull (1), med amañ en ti hag amañ e chomfont keid ma vin-me beo, ha n'on ked c'hoaz tost da ver-vel.

FRANCINE

Lom, na c'hwi na me ne ouzom ked pegen tost om da vervel rag an eur-ze a zo koached ouz an oll.

LOM

Alo, tra-walh a goz kêjou. Kôz an arabaduz, hir ha paduz.

SOAZIG

Ma zad!

FRANCINE

Ma eo koz kêjou toud ar pez a laran, eo koulz din tehel, grêd 'mo tro houllou da vihan-nañ evid eur reuz (2), rag den ne oar petra zo en hent.

War-ze neuze, kenavo. Kenavo, Soazig. (Mond a ra er-mêz).

SOAZIG

Francine, eun devez marteze.

LOM

Marteze petra? Lom zo plomm en e zav. Alo, pep hini 'n e hent, me zo mestr war an dachenn.

Mad, êd eo an drutell a-raog; bremañ neuze, ma merh, kerz d'an ti-traou (3) da lakaad ar gaoter war an trebez ha d'ober eun tamm yod ed-du da goan, ha me ha da zerri war al loened.

(1) eur bank o freuzi.

(2) a-rampo evid eur pennad.

(3) an ti-traoñ.

EIL DIVIZ

RONAN (war e wele)

Dorn Doue a sko 'hanon. A! nag a boan 'm-eus gouzañved amañ eur bloaz zo, taged gand eur hleñved kriz ha diremed, ha n'em-eus nemed eun dra da hortoz: ar maro.

Poan am-eus 'n em oll izili, med eur boan all 'm-eus c'hoaz kalz wasoh, eur preñv 'a zo noz-deiz o vroudañ din ma hofsiens, ar remors, ar zoñj da vezañ bed ar grizder da lahañ eun den.

Ya, me eo am-eus lahed Lom an Dosenn er Pavez-dir, hag eh on bed lach a-walh da lezel tamall eun all en 'n em flas, ha bremañ eo kased ar paour-kêz Jelvestrig d'ar galeou injus-tamant.

A! ma ouveje an dud ar wirionez!

FRANCINE (o tond)

Deiz mad, Ronan. 'Hanta, ma den kêz, penaoz 'mañ kont ganah?

RONAN

...Sell...sellet 'ta piou?

FRANCINE

Ya, me zo deud d'ho kweled ha da digas dah eun draig bennag. Petra a gemerfet?

RONAN

O netra! Ne dalv ked a boan.

FRANCINE

Hañ, geo avad, arabad dah 'n em lezel da vond evel-se; setu eun toullad frouez hag eur voutaillad win mad da 'n em greñvaad. Lezet 'hanon ivez d'ober eun tamm dresañ d'ho kwele.

RONAN

Dalv ked a boan. Feiz 'vad, kalz re vad 'vid ar seurt din-me.

(Mond a ra er-mêz)

SOAZIG

Ne ran ked a forz petra vo amañ da goan. Me ha d'am gwele da harmed dindan ma liñseliou. (Mond a ra er-mêz).

RONAN (e-unan)

A! Lom an Dosenn, te zo kriz ha digar evid da vugel, eur paotr reud, med direudi a ri. Lared 'teus oas mestr war da arhant, med aze a 'n em dromplez. 'N em vanked out o lared diragon peleh e oa da gantskoedeien, 'barz an ti amañ. Neuze vefont kaved. Me ne deuio ked an dour war ma daoulagad evid laerez. Gweled 'm-eus ma zud o laerez ivez pa oant re baour evid bewañ. N'em-eus bed na katechist na sarmen an skwer vad ebed, na plas deread e-touez an dud all. Reded 'm-eus ar vro, teuled ha disteuled.

Med bremañ 'n em gemerom ervad. En deiziou all, pa arruo ar martolod yaouank-se er gêr, o vezañ ma eo argased gand Lom, e vo soñjed penaoz a-nevo teuled e vañjañs warnañ ha kement taol fall a arruo amañ a vo tamalled dezafañ, n'eo ked din.

Ya, kemerom on amzer.

LOM

Ronan, pe eo dresed an horolaj pe n'eo ked, deus d'az koan. Gweled a ran n'eus ger a yod, med neuze vo debred eun tamm bara zegal, gand eun tamm kig-sall, ha lez ar geginerez d'ober penn-koz (1), ar ger diwezañ vo da Lom.

Alo, paotr, deus d'az koan, ma vo serred an nor. (souzañ a ra er-mêz).

RONAN

Serred an nor? ya, ya, eun devez arruo vo

(1) n'eo ked laouen.

serred an nor amañ.

Ma hoan avad, n'em-eus ked a naon o soñjal petra on in-zell d'ober, med arabad din diskwel dezafañ na da den all ebed. Arabad din ivez chom da grenañ, pa welan tu da gaoud arhant; pep hini evitañ e-unan!

Ma lezenn-me eo. Na Doue na mestr. Kregi leh vez, krog, ha lahañ deuz ar red. (Mond a ra er-mêz).

FRANCINE

Med nann, paour-kêz Ronan, pell zo vijen deud da weled 'hanoh paneverd on bed me manan gwall glañv hag eh on bepred brewed gand ar rann-galon ha memez gand ar vez, o ya, den na gompren petore poan, pegen spontuz eo kaoud eur bugel er galeou. Jelvestrig kêz, ma mab paour, kondaoned iñjustamant.

Ma 'peus soñj, Ronan? C'hwi oa en ti Lom an Dosenn pa oan bed eno o houlen e verh da dimezi evid ma mab, ha war digarez 'nevoa ked asanted an tad, an teodou fall o-deus tamalled e oa êd ar paotr yaouank pa oa arru deuz e dro pesketa da lahañ anezañ.

A! petore iñjustis gand ar varnerien. Kas eun den didamall da "Gayenne" evid pad e vuhez. A! ma faotr bihan.

Enfin, ar pezh a zo sur eo c'hoaz skañvoh e goñsiañs er galeou evid na 'h eo hini an torfetour o redeg hag o klask e blijadur gand ar hant an den a-neus lahed.

Ne laret ger ebed, Ronan. 'Michañs e-peus poan-benn deuz an derzienn; ne chomin ked pell da skuizañ 'hanoh.

Bepred e rankan lared dah penaoz 'n em glahar em-eus eun tamm esperañs.

Ma mab a-neus prometad da Itron Varia Druet penaoz, ma vez kaved eun dewez ar hriminel ha roed ar frankiz dezañ, e tigasas da chapel Sant Karre ar chadenn bounner a vez staged ganti beb noz a-bouez e droad hag a-bred pe diwezad, ar Werhez a selaou e bedenn.

Ne respontet ger ebed, Ronan. Sur mad e kaset re hir ma hêz, med eur gêz eo hag a zo gwir ha repeted a-lêz gand an oll dud, rag ne vezer ked evid harz da gomz deuz torfet ar Pavez-dir.

Paour-kêz klañvour, laret din 'ta petra hallfen ober evidoh? Petra 'peus c'hoant da gaoud?

RONAN

A! Petra? N'on ked evid lared... par... Pardon, 'benn... goud...goude. Nann, veritan ked.

FRANCINE

Ma Doue, me n'em-eus mann da bardoni dah. Ma 'mije avad, e oan prest d'ober. Med, laret din 'ta berr-ha-berr a-raog ma 'h in kuit, petra 'peus c'hoant? Petra 'peus ezomm?

RONAN

Gweled eur beleg.

FRANCINE

'Hanta dioustu, peogwir e tremenan dre ar bourk, me 'ha da zon er presbitor ha me zo sur ne vo ked pell an aotrou Person o tond beteg amañ.

War ze, e laran dah kenavo n'ouzon ked pe-goulz, rag me zo o vond da dilojañ da guitaad parrouz Plounevez-Moedeg evid mond da chom da Lanvelleg, leh 'm-eus eun ti hag a oa d'am fried.

Neuz 'ta, Ronan, kenavo, ha welloh yehed dah. (Mond a ra er-mêz).

RONAN

Ken...ken... O! Doue!...en dro...dro-mañ, 'h on peurstrafuilled. O! Med sellet piou a zo deud d'ober brao din? Mamm an hini a zo êd d'ar galeou 'n em flas.

A! ma dije gouveed hounnez e oan-me ar hriminel, O! lehed sur he-dije 'hanon, ha koulskoude nann, rag eur gristenez eo hag en kalon an dud-ze a zo eun dra bennag a harz 'hane da 'n em vañji.

Ha me bremañ wasoh evid biskoaz a zo taged gand ar remors a goñsiañs. Ha da biou ha pe-goulz eh anzavin-me ma zorfet? N'ouzon ked.

GWILL (o tond)

Salud, Ronan. 'Hanta, penaoz e tro ar rod

ganit?

RONAN

Ruillet 'vel a lerez war an tamm gwele paour-mañ. Med ahann, ne zavin ked kén.

GWILL

A! ba! ba! Hemañ zo kôjou gantañ. Da betra dit koll kalon evel-se. Petra 'teus neuze? Me ouveen ked e oas klañv.

RONAN

A! ...Petra? Kalz a dreou, da gentañ eur hrign-beo.

GWILL

Damen ya, pe daou, eur hañser, daoust peleh en biz bihan droad?

Ale, deus dezi, ha c'hoarz deuz ar vuhez, petra zoñj pegen kaer eo bewañ!

RONAN

A! gwir a lerez. Kaer bewañ, ya, evid an dud all, med me, ma ... ma... hoñsiañs.

GWILL

Sell aze, bremañ Ronan 'n-eus eur hañser 'n e goñsiañs. War ze han da azezañ, sell, da asuri da vuhez dit mar kerez, ha neuze hi da goz.

'Teus ked a zoñj, sell, e oam 'n em gaved asamblez en ti Lom an Dosenn en Plounevez? 'Hanta, lared 'moa da Lom bezañ asured e vuhez ganin, ha neuze marteze ne vije ked bed lahed, pe da vihannañ nije bed touched arhant.

Ar paour-kêz den! Lahed vez bezañ muntred 'n e di gand eur fripon laer daoned. Ya, an hini 'n-eus grêd an torfet-se, marteze zo en ivern 'benn bremañ, med da hortoz se, zo kased unan d'ar galeou, med ne gredan ked a vefe Jelvestrig an torfetour, war diagrez n'houlle ked rei e verh dezañ.

Med pa laran, ar Justis ra a-liez iñjustis. Alo, Ronan, sav da benn ha ro din eun toullad eksplikasionou ma asurin dit da vuhez, petra?

RONAN

Ro peuh din, sell, gand ma buhez, ne dalv ked a boan, me eo ma hoñsiañs...

GWILL

Hañ! Hemañ zo charre gantañ gand e goñsiañs. Me ne asuran ked a goñsiañsou. Ha neuze, petra 'teus da damall d'az koñsiañs?

C'hoaried 'teus eun dro gamm bennag evel toud an dud, mond da vrakoni, da lakaad krouglasou da goad Rozambo, da forest Koad-an-noz, med 'velkent pa 'teus na laered na lahed.

RONAN

A! Hast am-eus.

GWILL

Hast da betra? Da vond da beleh? Da weled piou?

RONAN

Da... da...weled eur... beleg.

GWILL

A! daich, en dro-mañ, e lakeez ahanon da adkouezañ 'n em hoaze. Te, te, Ronan, klask ar Person? Hag-efi pa 'h em asamblez da vrakoni, pa weles 'nezafi war an hent, ha 'n em voutes 'n eun toull zannel evid nompaz saludi anezafi?
(1)

RONAN

Ro peuh, sell, pa vez beh war eun!

GWILL

Ma! Ma! souezed vo an dud o kleved komz ouzit, rag n'out ked anavezad 'vid bezañ eur glesker dour benniget.

(1) eun toull zannel= eun toull broh

22

RONAN

Ya, Gwill, souezed vo an dud pa glevfont.

AR PERSON (o tond)

Salud, ma zud vad, ar peuh da vezañ ganeoh.

GWILL

Salud, Aotrou Person.

AR PERSON

A! deiz mad. Sell 'ta, Gwill an asurañsou? 'Hanta, Ronan, te neuze zo klañv. Petra zo ar-ru ganit?

RONAN

A! Aotrou Person, ze zo... di... diêz da lared.

GWILL

Ba! ba! Me gred penaoz Ronan a ra gwad fall; oar kied e-unan gand petra, med n'eus ked bed grêd ordinal, rag hemañ zo bed eun evn.

AR PERSON

Hag a vo c'hoaz pa zavo alese.

GWILL

War ze, me ha da lezel ahanoh ho-taou ha da lared dah kenavo.

RONAN

Gwill, grez eun dra evidon. Kerz da glask eun test ha deus gantañ endro. Kerz da glask an Aotrou Mêr.

GWILL (sebedenned)

Ola 'vad!

AR PERSON

Petra, an Aotrou Mêr? Hañ feiz 'vad, n'emañ ked a-bell; 'h on o paouez komz gantañ aze war an hent.

23

GWILL

Neuze 'ta han d'ar red war e lerh. (Mond a ra er-mêz).

RONAN

Azezet bremañ 'n em hichenn, mar plij, ma êsain goul... goulenn pardon. Koulskoude, n'a-neus pardon ebed evidon.

AR PERSON

Med geo. Doue a bardon ha me a ra ivez. Gwir eo ne 'poa biskoaz c'hoaz digored din dor ho ti, na klasked ivez antren 'n em zi-me, nag en ti on mestr en iliz, med gweled a ret eh on deud dustu pa 'deus lared Francine din e oah klañv hag e-poa c'hoant da gomz ganin.

RONAN

Ya, Aotrou Person, c'hoant braz hag ezomm.

AR PERSON

'Hanta, ma den mad, mar gallan, e roin dah ar pez ho-peus c'hoant hag ezomm. Da gantañ, petra eo ho kleñved? Petore poan ho-peus?

RONAN

Poan spered, remors a goñsiañs, eur hrign-beo hag a ha da has ma horv d'ar vered ha ma ene dirag ar barner braz, santoud a ran.

AR PERSON

'Hanta, ma den paour, ar barner braz, daoust ma 'peus ked sented dioutañ, ma houlennet pardon, a bardono an tammou tarchou a zo en ho puhez, med da vihannañ pa n'ho-peus grêd torfet ebed.

AR MÊR (o tond gand Gwill)

Salud toud an dud. Salud, Aotrou Person.

24

AR PERSON

Salud, Aotrou Mêr. Setu nim asamblez adarre.

AR MÈR

Ya 'ta, 'n em gaoud a reom. 'Hanta, Ronan, petra zo neuze? N'a ked mad an treou?

RONAN

Nann, 'vid ganin-me, na gand unan all c'hoaz, ha me zo kaoz.

AR PERSON

C'hwi zo kaoz? Kaoz da betra?

RONAN

Kaoz m'emañ Jelvestrig er galeou.

AR MÈR

Petra? Petra? Te zo kaoz?

GWILL

Ya, med klevet Ronan ivez 'ta!

RONAN

Ya, azezet bremañ, pa zo amañ testou a-bouez, tud dign da vezañ kreded. Deud eo an eur evidon da anzav ma zorfet. Eh an d'ober eur govizion publik. Me eo ar hriminel maluruz, am-eus lezed kondaoni eun all 'n em flas. Me eo an hini 'n-eus lahed Lom ar Pavez-dir.

TREDE DIVIZ

E-tal ar feunteun, e Sant Karre)

Anton an Dall ha Mona a zo o houlen an aluzen.

Ar vamm-goz a deu gand he merh-vihan.

MAMM-GOZ

'Hanta, ma zud kêz, 'm-eus aon oh o selaou ar hleier o son?

ANTON an DALL

Selaou 'vel a laret, me ne welan ked skler, med da vihannañ, kleved a ran. Setu e plij din selaou.

MONA GOZ

Ya 'ta, eh om o selaou kleier ar gousperou.

MAMM-GOZ

Me blij din ivez selaou kleier Sant Karre.

MONA GOZ

Neuze oh deud d'ar pardon ivez gand ho merh vihan?

MAMM-GOZ

Ya, hag an drutell vihan, zoñj dah, oa o houlen diganin aze, petore hano a-nevoa ki an Dall? Sell! goulenn digantañ bremañ 'ta!

ANTON an DALL

Hañ? Ma hi? Ma hi zo Filoster e hano. Sach war e lost hardiz; grognal a ra med digor ked e henou.

MONA GOZ

Ha neuze, n'eo ked pa digor e henou e krog.

MAMM-GOZ

Nann, med pa zerr 'nezañ, sell! Maella, kerz da lakaad daou wenneg da donton Dall 'n e gokenn.

MONA GOZ

Mad a ret, Mamm-goz, deski dezi a-bred rei aluzon d'ar paour.

ANTON an DALL

Trugarez, bihannig, ha gras dit da greski ha da vezañ fur ha koant.

MAMM-GOZ

Fur ha koant ivez, war ze Mona-Goz, roet din eur bannah dour fresk deuz ar feunteun, mar plij, ma hefom d'ar gousperou, ha goude e van-ko da houmañ mond war ar gazeg-viz-even, kouta?

MONA GOZ (o rei dour)

Rêzon he-deus avad. Kement ha dond d'ar pardon, mond d'ober eun dro da frañwel (1) he lostenn. Setu eur bannah dour. Te 'z-to eur bannah ivez, Maella? N'eo ked ze da hano?

MAMM-GOZ

Ya, ev eun dakenn ivez ha room eun tamm aluzen da Vona-Goz ma hefom adarre. Kenavo da vloaz. (Mond a reont er-mêz).

MONA GOZ

Trugarez ho-tiou.

ANTON an DALL

Ya, hag Itron Varia Druéz d'ho pennigañ.

IVONA HA TINIG (o tond)

MONA GOZ

Hañ, arru zo keurennoù amañ en dro-mañ. C'hwi zo 'michañs o tougen ar bannier?

ANTON an DALL

Hola! Merhed ar bannier? En koefou braz neuze 'vel just.

(1) o frañval

TINIG

N'om ked o tougen ar bannier, pa n'om ked deuz ar barrouz. Nim zo deuz Plufur.

IVONA

En koefou braz, emezañ? Klev ar zod koz-se 'ta!

TINIG

Roi ked a beuh, te!

MONA GOZ

Ya, plah skañv, rag n'ouzoh ked petra oh o lared aze. Anton, kleo, n'eus ked kalz a dam-mou sod oh ober anezañ.

ANTON an DALL

Ma feiz 'vad, tra-walh eo din bezañ dall, kuit da vezañ sod da stagañ ivez.

TINIG

Ha pell zo oh dall?

ANTON an DALL

Feiz sur, pa oan krennard e oan bed bornied gand eun taol mên, ha goude oan bed divorgned gand eun taol foet.

IVONA

Ha gand petra e oah bed dalled neuze?

TINIG

Petra? 'Teus ked komprened? Me gred out so-toh evitañ. Bezañ divorgned zinifi bezañ dalled.

MONA GOZ

Bezañ dalled, ya, ze zo kaoz e renk bremañ bewañ diwar an aluzen.

TINIG

Paour-kêz den! Me ha da rei dezañ dustu, ha

dah a rin goude ivez.

MONA GOZ

Mad a refet, ha goude e rin dah eur bannah dour.

IVONA

Greze aluzen mar kerez, hag ev dour goude, me 'avd eo fae ganin dond keid-mañ da glask dour. Me viro ma arhant da brenañ diou gram-pouezenn hag eur bannah lez gludenn. (Tinig a ro eur gwenneg d'an Dall; neuze eh ev dour hag a ro ivez d'ar baourez).

ANTON an DALL

Trugarez, hag ar Werhez da rei sklerijenn dah.

MONA GOZ

Bennoz Doue dah, plah yaouank. Ze dougo chañs dah bezañ mad ouz an den dall hag ar paour-kêz intañvez.

IVONA

Heu! Ma oh intañvez, ma karjah ne oah ked!

MONA GOZ

Sell 'ta! Penaoz se?

IVONA

Bezañ chomed heb dimezi, neuze vijeh ked bed intañvez.

TINIG

Ivona, roi ked a beuh.

MONA GOZ

Pompinell, hetan droug ebed dah, nemed heti dah pas kaoud eur paotr da dimezi.

ANTON an DALL

Ya, pez didruez, c'hwi peus ezomm da vond

da weled hag-eñ eo krog ar sarmon.

IVONA

Sarmon a-walh 'vel-se, me eo welloh din mond da weled hag-eñ zo eun tamm muzik hag eun tamm dañsou war ar blasenn. (Mond a ra er-mêz).

TINIG

Red eo din mond war he lerh. Kenavo da vloaz.

ANTON an DALL

Ma n'eo ked spontuz gweled pegen divergont eo arru an dud yaouank.

MONA GOZ

An dud yaouank? Me blij ked din kleved ar ger-ze. E-touez an dud yaouank a zo kalz kalz a reou vad, ha ma tro hiniennou kostez eo mar-teze faot o zud, ha neuze, red eo kaoud beb seurt evid ober ar béd.

ANTON an DALL

Gwir a-walh a lerez. Ma vefe 'med reou dall evel don, eh afe ar béd a-bred a-benn-boual er mor.

JELVESTRIG (o tond)

O Doue! ma zud vad, me zo skuiz, skuiz ha maro gand ar zehed.

MONA GOZ

Ma den paour, me ha da dapoud dah eur bannah dour fresk.

ANTON an DALL

Med ma oh ken skuiz-ze, azezet aze tu bennag evel dom ivez. Neuze 'ta, sur a-walh, e-peus grêd eur veaj hir da dond amañ?

MONA GOZ (o rei dour)

Eur veaj hir? Istoh evitañ a ra, rag d'ar

pardon-mañ e teu tud a bell.

JELVESTRIG

Deuz a bell? Deuz ken pell ha me memestra n'eus deud biskoaz den ebed.

MONA GOZ

Me 'm-eus soñjed diouz ho kweled e oah arru da houlenn an aluzen eveldom ivez.

JELVESTRIG

A! Nann! n'on ked arru da houlenn an aluzen, nag ivez da rei aluzen dah, rag er mare-mañ, eh on ken paour ha c'hwi.

ANTON an DALL

Ken paour ha nim? O! Feiz! neuze n'eo ked druz ar peuri ganah, rag nim avad a zo paour evel Job.

MONA GOZ

Hañ, feiz ya, med azezet 'ta war ar mên aze e-harz ar feunteun d'ober eun diskuiz.

JELVESTRIG

Ne glaskan ked welloh, med marteze vin war hent ar belerined a deuo da evañ dour.

MONA GOZ

Ne vefet war hent den ebed. Azezet pa laran dah.

ANTON an DALL

Bremañ, ken vo achu ar gousperou, n'arruo ked kalz a dud da evañ dour.

MONA GOZ

Na pa arrufe, vo ked a boan da den ebed mond da glask trabas ouzoh aze, rag daoust ma n'eo ked ar horn douar-mañ din, dewez ar pardon, an oll a renk senti ouzin endro d'ar feunteun-mañ. N'eo ked gwir, Anton?

ANTON an DALL

Geo avad, Mona-goz a ra ar lezenn amañ beb bloaz hag arabad vez da den ebed bale war he zreid. Beteg ma hi na gred ked harzal pa glev anezi o hrozmolad, betegoud e rafe eur sach war e lost. (Jelvestr a vousc'hoarz).

MONA GOZ (o selaou)

Roit peuh. N'ouzon ked petra a glevan?

ANTON an DALL (o selaou ivez)

An dud o kanañ sur. Arru eo ar prosesion.
(Dreg ar rideoj e tremen tud o kanañ):

Itron Varia Sant Karre,
O Mamm Jezuz, Mamm a drue,
Goulnnet evidon pardon,
C'hwi zo ma Mamm ha ma Itron.

Goulet ma chomo gras Doue
En em halon. Mamm a drue
Pa vin gand Doue arru mad
Am-mo êzetoh ma mennad.

Gret ma unanfet, o Mamm vad,
Ma foaniou-me gand re ho mab.
Me na rin van 'vid skuill daero
Rag en nefiv goude me gano.

JELVESTRIG

A! Pebez plijadur a ra din kleved ar gan-ze! er bloaveziou all e hallen ivez kanañ ar hantik kaer-ze.

ANTON an DALL

Neuze oh bed c'hoaz er pardon-mañ?

JELVESTRIG

O ya! amzer eo bed e teuen beb bloaz, rag ma zad pa oa beo, ha ma mamm bepred a zo devod da Itron Varia Druéz.

MONA GOZ

Med da betra n'it ked bremañ war-lerh 'benn ar zalud, rag amañ vez roed Bennoz ar Zakramant euz lein an tour.

JELVESTRIG

Kared a rajen mond da heul ya, med re fall wisked on.

ANTON an DALL

Petra? Oh deud gand dillad fall d'eur pardon ken kaer?

MONA GOZ

Ya, me zo souezed eun tamm o weled 'hanoh. Lared vefeh o tond diwar ho labour!

JELVESTRIG

Souezed? Ma lavarfen dah o tond deuz peleh ah on, e vefeh muioh souezed c'hoaz, marteze memez na gredfah ked 'hanon. Eun dra bounner zo ganin da rei d'ar Werhez. O sellet! n'on ked ken evid souten ma fenn. (harpañ a ra ha menel kousked).

MONA GOZ

Biskoaz kemend-all! Sell, Anton, eh a da venel kousked aze.

ANTON an DALL

Ha daoust piou hag a beleh e vefe hennez? Gweneg ebed warnañ. Petra mijem grêd evitañ? Ar paour-kêz den!

MONA GOZ (o soñjal)

Me oar avad, peogwir an itron vad a zo newez arru da chom aze e-tal ar chapel, a deu bemdez da digas dim beb a damm zoup. Ma teu hirie a-darre, ar pezh a-meum d'ober eo lodenni gantañ on zamm pred, rag daoust dim da vezañ paour, e-meum eur galon ivez ha n'eo ked grêd gand eur vilienn.

ANTON an DALL

'Hanta ya, ha peogwir e vez digased dim beb a skudellad, e hallfom rei unan dezañ ha lodenni eben etrezom on-daou.

MONA GOZ

O ya, med hirie p'emañ ar pardon, an itron-ze 'devo ked amzer da dond da digas zoubenn dim. (Francine a deu). Dal 'ta, pa vez komzed euz ar bleiz.

ANTON an DALL

Veze gweled e lost pe dost. E oam just o komz ouzoh.

FRANCINE

O komz ouzin? 'Michañs o lared e oan diwezd o tigas ho soubenn dah, med c'hoant em-oa, p'emañ ar pardon, da heuill an ofisou. Sellet 'ta, eur paour all a zo kousked aze, e-harz ar feunteun?

ANTON an DALL

Ya, unan hag a zo ken paour ha nim, ha skuizmaro da heul.

MONA GOZ

ZE zo kaoz vije welloh dah rei dezañ eur skudellad hag Anton ha me a lodenno eben.

FRANCINE

Hola! hola! vo ked kont evel-se. Arabad dah yun abalamour d'an den-ze, rag du-mañ a zo zoubenn c'hoaz ha ne vin ked pell o vond da gerhed eur skudellad dezañ, hag ivez ma 'n-eus ked a lojeiz da dremen an noz, me a roio dezañ eur gwele 'n em zi.

Dalet, kemeret ho soubenn evel kustum.

MONA GOZ

Trugarez, c'hwi 'velkent zo re vad evidom.

ANTON an DALL

Bennoz Doue dah, itron vad.

FRANCINE

'M-eus aon ne oa ked nemeur a dud endro dah. Grêd 'peus eun dewez mad a-walh memestra?

ANTON an DALL

O! feiz 'vad. Skañv eo ma halon. Dalvezo ked ar boan da den ebed dond da vougañ 'hanom fe-noz evid kaoud on arhant.

MONA GOZ

A! ba! Anton amañ a vez kôjou gantañ. Piou a gav dit a deufe da vougañ 'hanom? Dre amañ n'eus ked a dud fall a-walh da lahañ ar reou all evel-se.

ANTON an DALL

Arsa! Daoust hag-eñ ne oa ked bed lahed unan aze e Plounevez-Moedeg, Lom an Dosenn, er Pavez-Dir. 'Michañs, itron, e-peus klevet komz deuz se koulz ha nim ivez?

FRANCINE (o huanadi)

Klevet koulz ha c'hwi? Ya pe welloh, rag ma 'n-eus gouvezed unann bennag eo me.

MONA GOZ

'hanta ta, ha c'hoaz e lare an dud, e oa tamalled unan en-faoz ha penaoz an hini a zo êd d'ar galeou n'eo ked an torfetour.

FRANCINE

Nann, an hini a zo êd d'ar galeou eo ma mab inosant-didamall.

MONA GOZ (oh ober eur lamp)

Ho mab? Ho mab? C'hwi, itron vad?

ANTON an DALL

Petra leret? Ho mab? Tamalled en gaou?

FRANCINE

Ya, med distrei a raio rag ar hriminel zo maro tri dewez goude bezañ anzaved e dorfet.

ANTON an DALL

Ma! Ma! Ken eo kouezed ma loa deuz ma genou ha bremañ ne gavin ked 'nei. Tiens! Klask ma loa din 'ta.

MONA GOZ

Gwerhez Vari, arruoud a ra treou memestra.

FRANCINE

Ya, arruoud a ra treou ha ma mab a arruo ivez eun dewez er gêr, med pegoulz? 'Benn tri miz? 'Benn eiz deiz? Emañ ar justis bremañ o klask diluriañ ar gudenn o-devoa luried d'ar houlz-se.

Ya, arruoud a raio, en deiz merked gand ar Werhez.

Arsa, me ha d'ar gêr da lakaad eur bannah soubenn war an tan, ha 'vel-se, pa deuin da gerhed ho skudellou, ma vez divun ar paour a zo aze, e teuo ganin du-mañ d'e goan.

Neuze, ken emberr.

AR BEORIEN

Ken emberr, maouez vad! Mona, hastom buan debri on soup keid ma n'eus den.

Hañ! C'hwi zo o tond, plah yaouank? Deut 'ta neuze, n'et ked da gaoud aon.

SOAZIG (o tond)

A! N'em-eus ked aon ivez, nemed aon da dirrenkañ 'hanch ma oh o tebri ho koan.

MONA GOZ

On hoan? O! feiz 'vad, me n'on ked petore pred eo hemañ, med nim a renk debri pa vez digased dim.

ANTON an DALL

O! N'eo ked tener. Me n'ouzon ked pegoulz vez koulz koan deuz koulz lein, ha paneverd ma klevan ar hreisteiz o son e Plufur pe e Lanvelleg, ouifen ked peleh vez arru an amzer, ha buan a-walh e rafen evel ar brohed, mond da gousked en deiz ha da halomped en noz.

SOAZIG

N'eu forz, rei a ret enor d'ho skudell. Diouz ho kweled, eo mad ar pez a zo e-barz.

ANTON an DALL

Hañ ya, avad, ha daoust ma ne welan ked skler, pa 'mez ar seurt soubenn-mañ da gas d'am genou, ne skoan ked kostez.

SOAZIG

Mad a-walh a ret; e-keid ma talhfet d'ober 'vel-se, ne varvfet ked.

ANTON an DALL

O! feiz 'vad, n'eus forz pegoulz eh in-me gand Erwanig Plouillo, vo ked braz an diouer; vo nemed ma hi da gaoud keun din.

MONA GOZ

Aze, kleuzed 'm-eus ma skudell ha liped ma loa-goad. Bremañ eh an da dapoud dah eur bannah dour.

SOAZIG

Trugarez, o hortoz ze ah on.

MONA GOZ

Med penaoz? Oh deud hoh-unan d'eur pardon braz evel-henn? Heb eur gamaradez pe eun tamm kamarad, eur plah zerz eveldoh?

ANTON an DALL

Hañ! ar plah yaouank zo heh-unan? Piou neuze a baeo dezi eun taol kazeg-viz-ewen?

SOAZIG

O! Me ne ran ked a forz peleh eh aio kezeg-viz-ewennou, ha pa oh krog da hegañ 'hanon, eh an da lared dah penaoz em-eus eur hamarad, med pell braz diouzin, med zouden e tosteo.

ANTON an DALL

Marteze emañ oh ober e goñje?

SOAZIG

E goñje? Eur hoñje drol! Jelvestrig a zo er galeou.

MONA GOZ

O Gwerhez sakr! memestra ne gemerfet ked eur galeour?

ANTON an DALL

Dampred a vo nann, rag neuze eo eur laer, eur hriminel. Arsa, me gêze kreñv, harz ar paour zo amañ da gousked.

SOAZIG

Na laer na kriminel; hennez zo didamall.

MONA GOZ

Hañ, feiz, 'vid neuze, red eo dah kontañ ze dim.

SOAZIG

'Hanta, 'vel-henn eh eo. An den yaouank-se 'nevoa digased e vamm da houlen ma dorn digand ma zad, ha hemañ 'nevoa lared "nann". Prestig goude, ma zad paour a oa bed muntred ha tamalled an torfet d'ar paotr yaouank, hag a-raog ma oa kased da Gayenne, e oan bed o waled anezañ en prizon Lannuon, hag eno em-oa prometed dezañ penaoz ne rafen darempred ebed

na dimezi da eun all, ha ze zo kaoz eh an d'ar pardonioù ma-unan.

ANTON an DALL

Ma feiz, kleved a ra eun treou amañ hirie. Ken a chom war e gemend-all!

MONA GOZ

Hañ ya 'vad, med zofj dah, ar vamm a zo bed o tigas on zoup dim he-deus ivez, emezi, eur mab er galeou, med e tle dond d'ar gêr.

SOAZIG

Ma mignon a zo ivez war dond d'ar gêr, rag an torfetour a zo 'n em dizoloed a-raog mervel. C'hoaz oan o vond da ankouaz rei eun tamm aluzon dah.

MONA GOZ

O! ze 'nije ked harzed 'hanom da lared eur bater evidoh, rag stanked om bed: bennoz Doue dah, plahig.

ANTON an DALL

Trugarez ha chañs dah da weled ar paotr yaouank-se o tond heb gortoz re bell, deuz ar prizon braz-se.

SOAZIG (o selaou)

Med selaouet 'ta! Kleved a ran kanañ.

MONA GOZ

Med ya, ar prosesion zo o tistrei, rag ober a ra eun dro hir.

ANTON an DALL

Selaouom 'ta neuze, n'ez ked da harzal, hañ! koz ki!

JELVESTRIG (o sevel e benn

ha frotañ e zaoulagad)

A! eur gan pegen kaer!

Lared vije kantik Sant Karre, med pe 'h on divun pe 'h on o huñvreal? Ha peleh on? pe 'h on c'hoaz er galeou, pe 'h on arru e Lanvelleg?

SOAZIG (sebedenned)

O!... daoust hag-efñ n'eo ked te...eo Jelvestrig?

JELVESTRIG

O! Soa...ma... Soazig! (Aze en em vriatont)

MONA GOZ

Itron Varia Druetz!

FRANCINE (o tond)

Arru 'h on; 'hanta, goullou eo ar skudellou. Jezuz Doue, piou eo ar re-mañ?

JELVESTRIG

Mouez ma mamm!

FRANCINE

Da vamm? Te, te, ma mab neuze? Med, nan out ked heñvel.

JELVESTRIG

Me 'h eo koulskoude, O! ma mamm.

SOAZIG

Geo, Francine, ho mab eo ha me danvez ho merh-kaer.

FRANCINE

O! Ma Jelvestrig!
Ha te, Soazig, zo arru amañ ivez?
O, med, bugel paour, te zo cheñched.

JELVESTRIG

Ya, rag n'eo ked brao bezañ er galeou.

ANTON an DALL

Dreist-oll pa vez iñjustamant.

SOAZIG

Med lavar dim penaoz out arrued er gêr dija?

JELVESTRIG

Dija, a lerez? Me ne gavan ked re vuan.

FRANCINE

Nann, med ze zo ken pell ahann.

JELVESTRIG

Gwir eo, med arrued on bepred, ha just dewez ar pardon; ha setu me evuruz dija o kaoud ma mamm gand he halon, ha ma Soazig gand he harantez.

Bremañ, me gred n'eus den o stourm ouzit hag eh out prest da unani da vuhez gand ma hini, ha tamm-ha-tamm vo ankouaed ar boan dremenet.

SOAZIG

Ya, Jelvestrig, bremañ, pa 'h on mestr din ma-unan, e roan ma ger dit, rag ma teus bed-te poan gorv, da vamm ha me on-deus bed ivez poan spered.

FRANCINE

Ya zur, eur gont bennag, med da vihannañ, setu bremañ eun eured da stummañ, ha c'hwi, peorien gêz, test deuz ar burzud, a vo pedet ivez.

MONA GOZ

Petra, ma Doue, nim d'an eured? Med n'om ked deread! Aze vo tud pinvidig ha tud faro. A! selle! petore tammou draillou zo endro dim, ha koulskoude 'h om en on haerrañ.

ANTON an DALL

Ya, 'velkent vin ked-me da benndalli d'an eured gand ma hi. Me 'h ay da houlenn an aluzon da doull dor an iliz.

FRANCINE

D'ar friko a deufet, pa laran, er baradoz e vo an dud pinvidig hag ar beorien ouz ar me-meze taol, hag amañ vo mad deze bezañ.

MONA GOZ

Ma feiz, neuze 'h efom 'ta!

SOAZIG

Med hast buan lared dim 'ta penaoz e teus grêd da dond deuz ar galeou?

JELVESTRIG

Feiz sur, pa oan arru e Cayenne, em-oa prometet da Itron Varia Druetz, penaoz ma vije gouvezet ar wirionez ha roed ar frankiz din, e teujen diarhenn da digas dezi ma chadenn en anaoudegez vad. Ha sur he-deus lakeed ar hriminel da anzav e dorfet.

FRANCINE

Med peleh emañ da chadenn?

JELVESTRIG

'H et da weled dustu. Ganin e oa war ma chouk. (O tiskwel) Sellet, gand houmañ e vijen staged beb noz a-bouez ma zroad ugent lur a bouez.

ANTON an DALL

Ha kement-se zo gwir, evel just.

JELVESTRIG

Ya, rag welloh eo din distrei c'hoaz d'ar galeou evid lared gevier.

Ha bremañ eh an da lakaad anezi er plas emeus choazed eviti, er chapel war an treust en tu dehou d'an aoter vraz.

FRANCINE

Ha nim ah a da vond ganit ivez.

JELVESTRIG

'Hanta ya, hag evel-se, 'benn kant vloaz ha kantvloaveziou amañ, kement den a deuo da chapel Sant Karre da Lanvelleg a welo eno chadenn ar galeour.

10.8.77

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VIZIEG

10 niverenn ar bloaz

60 lur

da gas da:

Brud Nevez, K.R.P. 893-94 P Roazon

pe da:

BRUD NEVEZ, 6, ru Beaumarchais, 29200, BREST.

E GWERZ E TI **BRUD NEVEZ**:Jakez Riou: Nominoe-Oe

Gorsedd-Digor

Geotenn ar Werhez ha barzonegou.

An ti satanazed

Per-Jakez Helias:

Mevel ar Gosker

Tan ha ludu

An Tremen-Buhez

Piou e-neus lahet an hini koz?

Jakez Krohenn ha Gwillou Vihan

Eun ano braz

Mikael Madeg:

Pemp troad ar maout

Per Trepos, Charlez ar Gall, P.M. Mevel, J.Abasq, My Skaouidig, K. Riou, R. Derrien

Danevellou euz an Amzer-vremañ.

Maria Prat:

Peziou-c'hoari.

Yvez Miossec:

Eur veaj e Stadou-Unanet an Amerik
Dreist ar mor braz

Naig Rozmor:

Karantez ha karantez

P.M. Mevel ha Naig Rozmor:

Peziou-c'hoari

Synge:

Lapous-den Penn-ar-Béd

Remi Derrien:

O Chezuz!

Kergourlez:

Bitek-le

Dahud

Brendan Behan:

An Ostaj

Visant 'n Askol:

Ar huzul digor

Ar marichal du

Ernest ar Barzig:

Buhez ha faltazi

Diuzed:

Gwad ar garantez

Ha meur a leor all...

Goulennit ar roll anezo digand

BRUD NEVEZ

6, ru Beaumarchais 29200 BREST

